

GWERZ GAREN AR BRIS

Var eun ton trist.

Person Caouen a lavare,
E prôn an ofern, eur sul a oe :
« Otro Doue, emean, Caouenniz,
Eur c'hélou trist zo 'n oc'h iliz.
Arri a zo eun decret neve,
Deut demeus abeurz ar Roue,
Da laret a vo ret cavet
Ar c'horfou guellan euz ar oerset.
En hano Doue, me o supli,
En Lanhuon n'em geved c'hui. »

Cri vije ar galon, ma na ouelje,
En ker Lanhuon, nep a vije,
O velet Caouen ha Plouber
Bihan ha bras o tond en ker;
O velet Caouenniz o velan
Quen a felle de fatitlan.
Plouberiz a neveuz tennet,
Gand Caouenniz van ar billet;
Manet ec'h e gand Caouenniz
Digoueet e da Garen ar Bris.

Garen ar Bris a deplore,
Ne gavje den e consolje;
Ne gave den d'en consoli,
'Merd e baeron pa oa arri :
« Ma fillor paour, na velet qet,
Serviji ar roue zo ret.
— Me ne rajen fors 'vit partian,
Penevert ma mamm a zo clan :
E man var e guele seiz vla-zo
Ha ne deuz nemerdon var he zro.

Garen ar Bris a hirvoude,
An nôr var e vamm pa diore :
« Sevet, ma mamm baour, a le-ze,
Ma rin c'hoas eur vech o guele.
— Pe te zo squiz ouz ma guelet?
Pe te zo squiz gand ma c'hlemvet?
— Ne non ket skuiz ouz o guelet,
Na quen neubeut gand o glemvet :
O tenna d'ar billet ez on bet,
Zoudard 'vit Caouen on laquet. »

Pa voant o daou o teplori,
E c'hantre e gamarad e ti,
Hac a lavaraz evel-hen,
'N eur antren, d'ar paour Garen :
« Hastit, ma c'honsort, depechan,
Ma c'heomp da Guengamp da lojan.
— Me ne rajen fors 'vit partian,
Penevert ma mamm a zo clan :
E man var e guele seiz vla-zo
Ha ne deus nemerdon var he zro. »

Garen ar Bris a deplore,
An nôr var e vamm pa serre :
« Me lar dec'h, ma mamm, kenavo,
Er barados ni n'em velo. »
Da vates ar person a laraz,
E presbyter Caouen pa arriaz :
« Dalet, mates, ma alhoueou,
Soignit ma mamm baour a vechou.
« — Lequet oc'h alhoueou lec'h ma querfet
E lec'h ma o lequefet o c'hefet. »

Neuze e laraz d'ar person,
O sonjel eat consolation :
« Person Caouen, m'ar am-c'heret,
Ma alhoueou diganin-me quemeret ;
Recommandet ma mamm 'n ho c'hofern bred,
Ma iel an dud vad de guelet.
— Lequet, eme person Caouen,
A lavaraz d'ar paour Garen,
Lequet oc'h alhoueou 'lec'h ma querfet,
E lec'h ma o lequefet o c'hefet. »

« Otro sant Garen, ma faeron,
Gret evidon eun dônêzon :
Lequet o cleier da son canvo
D'am mammic baour pa vo maro,
'Vit ma c'hellin, pa o c'hlévi,
Donet d'ar gær d'he c'hinterri ;
Rac pa e dilezet, ha hi clan,
Gand an dud, pa bartian,
E vo ive pa vo maro,
M'ar na ven quet var he zro. »

Eun de pa oa Garen en arme,
Pemp cant leo demeus e gontre,
E scoas eur c'blaouen 'n he galon,
O clévet cleier Caouen o son.
Ar Zant a nevoa roet dean
Pez neva goulet digantan ;
Rac ar c'hleier a zone canvo
D'e vamm baour a voa maro.
Ractal e laraz d'he gabiten,
En eur ouela, evel-hen :

« Iscuz, ma c'habiten, a c'houlan,
Prest é ma c'halon da rannan ;
Me gleo cleier Caouen o son canvo
D'am mammic baour a zo maro.
— Penos a oufes clevet ane,
Ha te pemp cant leo dioute ?
— O troad var ma hini lequet
Hac evel-d'hon-me o c'hlevfet.
— Dalet-ta ho conje, Garen,
Hac en em rentet é Caouen. »

Garen ar Bris a vonjoure,
E bourg Caouen pa arrue :
« De bonjour d'ec'h-hu, Caouenniz,
Pretra zo a neve n'hoc'h iliz ?
— Garen, na gomprenomp netra,
Ni en asur, en quement-ma.
E man ar c'hleier o son tri miz-zo,
Hep ma zo den beo var o zro ;
Tri miz-zo e maint er guiz-ze,
Hep ma neuz den touchet out-he. »

Garen ar Bris a lavare,
An nôr var e vamm pa diore :
« Me vel, ma mamm, ez oc'h dilezet
Aboue ma c'hom-me partiet,
Rac var an treuzo a velan
E c'he leset ar ieot da divoan. »
Pa antreaz ebars an ti,
Ar Verc'hes voa ouz e lien.
A vriet 'n e vamm e croguet
Ha var ar plas ec'h e marvet.



AR MEMEZ TRA

« Ar bed oll, eme Iann goz, a gemer eur stum fall,
N'euz chomet war an douar mann vel ma oa gwech all. »
Paour kez Iann, c'hui zo chenchet, dre m'oc'h deued da c'hriza ;
Mez ar bed a zo chomet memez tra, memez tra.

Goude al loar, ar stered hag ann devalijen,
Gand an heol bep mintin e par ar sklerijen ;
Barz ann oabl an alc'hueder a zao enn eur gana,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Gand he chupen erc'h skornet, pa zeu ar goan kri
Da c'hourda hon bizied ha da ruia hor fri,
Ann eil demeuz egile daou bried a dosta,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

P'erru ann nevez amzer da c'head ar parkou
Da lakat bleun er balan, delio barz ar c'hoajo ;
Lagad ar merc'hed iaouank ive a zederra,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Ar vugale zo breman begek, beo ha seder ;
War meur a dra int gwiek arog goud ho *Fater* ;
Ann avalo hanvrued a blij d'he ar muia,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Ann diaoul a gollaz Eva bepred a zo temptuz.
Ar merc'hed koant zo ive atao bresk ha sentuz ;
Demeuz ar frouez difennet, kalz, siouaz ! a glanva,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Potred a weler bemde ho wapâd ar merc'hed ;
Merc'hed a weler ive ho kaketal potred ;
Touet kalz, derc'hel neubeud, a zo ar c'hiz brema,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra.

Nemed ar bragou toul-gwiz, al lero marellet,
Ar jeleten kov-iodek, ar berruken poultret,
Pez a chom a zo chomed ebarz ar stad ma oa,
Vel enn amzer tremenet, memez tra, memez tra. (Propriété.)